

## Chanson

Eñ henot[?] d'ar C'hont d'Esting, pehini en deus roet ar  
Bal da gommendant ar Teotigon, hanvet en Amiral  
Biron, hag oblijet anezan da baea ar zonnervien.

(226)

Var an ton gallec.

Biron en d'oa c'hoant dansal,  
Ha rei da Teotigon ar bal:  
Var bennoz g'enech, emezan,  
Pel amzer zo ma tezirion,  
Pa meus o carvet,  
Ober ar menuet.

Pa g'erot, eme ar C'hont,  
Me zo ato prest ha prompt:  
M'ho contanto, bezit assur,  
Dans ho pro e va fljadur,  
Hissit ar signal,  
Da zig'eri ar Bal.

(227)

Biron, dispos ha canfard,  
A blant c'hoes en e rombard;  
Mes Teotigon, gant e vision,  
A zispleg e jaritellou,  
Ha diouz ar musiq,  
A lam evel ur biq.

Teotigon, gant e zoufochel,  
A sco var Biron, en dre hell,  
Ac'hanta, emezan, Biron,  
Recubi a rit, va mignon:  
Grit ar reverans,  
Ne m'oc'h mui e cadans.

(228)

Quit e zàn, eme Biron,  
 Toret e va c'hroupion;  
 N'en deus diaoul en dour benig'et,  
 Qer erén hag ar c'hont a jaret, (1)  
 Mervel a rafen  
 Mar pad ar obaden.

Biron, trubuillet ha squis,  
 A serch rochet a ra tis;  
 Da Lant Christof e za souden  
 D'en em glêm eus ar gavoten:  
 Bigen, emezàn,  
 Gant ar c'hont ne zansàn.

Biron, clasqit e lec'h-al,  
 Dans Dextaign a zo brutal.  
 Var ar mor ha var ar douar  
 Hema zo garg'et a c'hloar,  
 C'hoas e paet ouzpen,  
 Mizou ar zommerien.

(Vol. I, p. 226-228).

---

(1). - Le vers est également répété au haut de la p. 228, par inadvertance sans doute.